

C A N T I Q

21

V A R B U E Z S A N T I S I D O R , P A T R O N A L L A B O U R E R I E N .

Var an ton ancien.

DRINDET santel, prosternet dirazoc'h d'an daonlin,
Me o ped da rei graçou d'o servicher indign,
Da gomposi eur c'hantiq en gloar hac en enor
Da Patron al Labourer, ar Zant bras ISIDOR.

C'hoant ha desir bras ameus, gant ar c'hraç a Zoue,
Da zisclery d'ar Vretonet an tenor e vue
Al lec'h ma voe bet ganet, e gontre hac e vro,
E oberyou excelant, ive e vertuziou.

Mes, Majeste adorabl, Doue, Roue an Trôn,
Tranqilisit va speret, ha tomît va c'halon,
Ma roit din hoc'h asistanç ebars em antrepris,
N'oufen qet bea goassa, erve ma meus avis.

Honont ar g'êr gapital a Spagn hanvet Madri,
E devoe an avantach guechal da brodui
Ebars en e fobourziou eur rosen precius,
An Otrou Sant Isidor, mignon bras da Jesus.

Bars en creis ar baourente ec'h antreas er bed,
Ha demeus ar baourente e ressantas bepret;
E g'erent voa roturier, a vadou dibourye;

Mes leun oant a santeles hac a zoujanç Doue.

Represanti a rejont , gant peb rejouissanç ,
Ar rejeton admirabl en templ gant diljanç ,
Ha var ar fons-badiant e visqas ar zê vèn ,
Pehini nen deus souillet biscoas e nep moyen.

Isidor è bet hanvét , balamour d'an honor
A zoug'e ar spagnolet d'eur zant all Isidor ,
Escop bet e Seville pa voa var an douar ,
Hac er fin eus e vue recompanset er gloar.

E dad a voa sourcius . e vam a voa ive
Da instrui Isidor el lezen hac er fe :
Carante hac union , exempl mat ha doctrin ,
Eo a rē an ornamant eus o bue divin

Ah ! pebes contantamant da un tad ha d'eur vam ,
Cavet digant un Doue eur bug'el qen divlam !
Qen douç , qen obeissant , qen pur ha qen parfet ,
Qen humbl , qen carantezus , qen docil , qen caret .

Pa deuas sqient deàn , ec'h ofras da Zoue
Ar faculteou santel demeus a e ene ,
E volonte , e speret , hac ive e vemoar ,
Hac e vue en antier da bossedi ar gloar.

Ar sonjezonou frivol na gavent qet a blas
En speret Sant Isidor , dont a rē d'o hargas ;
E galon oa siellet , na elle mann antren
A g'ement a oa control d'ar fe ha d'al lezen .

Ar sansou eus an natur oa gantàn reglet mat ,

Eus an enoriou monden ne r e qet a etat ;
 En ur g'ir, goell oa gant n mil ha mil guech mervel,
 Evit dont da gometi james pec'het marvel.

Pa deuas gallout dez n , hac  n cresq t en oad ,
 E tilezas e famill , e has da labourat ;
 Evel ma oa ezomec eus a vadou ar bed ,
 E renq s mont da gopra evit gonit e voued .

Evit gallout substanti ha beva e famill ,
 En em laq s da vevel en ti eun dijentil ,
 Da di an trou Vergas , eus ar g' r a Vadri ,
 Den a galite huel , e has da servichi .

Ebars er brofession demeus a guir gristen
 Oa fidel ha ponctuel da viret al lezen :
 Ebars er brofession demeus a Labourer
 Oa fidel ha ponctuel da ober e zever .

Pel qent an de e save Isidor bep mintin ,
 Ha dirac ar crucifi prosternet d'an daoulin ,
 Gant eur barfetes ampar a goif hac a galon
 E r e d'an Trou-Doue peden hac or zon .

Hog'en dre eur jaloui d'e vestr voe acuset
 A enep guir ha r son gant e gamaraded
 Da vea lach , feneant , disourci , dibreder ,
 Ha na r  bemde c'houlou nemet coll an amzer .

Toret   oll , emeze , o c'horf gant al labour ;
 Ne brise qet Isidor donet tam d'o zicour ,
 Nemet bea red-dired bemde d'an ilisou ,
 Hac ober e hipocrit , laret chapeledou .

Ar mestr evel ma clévas an acusation,
 A laras gant garvante : Isidor, va mignon,
 Me ne meus qet o cajet da laeres an amzer;
 Racse besit fideloc'h eur vech all d'o téver.

Isidor a respondas gant eun drêm gracius :
 En despit d'an oll valiç eus an dud anyius,
 Me servicho da g'enta Jesus, Mab da Vari;
 Ennàn ema va fianç, va suport, va apui.

Eun deiz e c'has Isidor d'e labour diveat,
 E vestr hac e partia d'e visita timat :
 Éruet tost d'ar mezou, e velas daou æl guenn
 O cundai an arer bars en creis an dachen.

E vestr a laras neuse sésisset gant eston :
 Foz ê, evel a velân, an acusation ;
 Me voar dre experianç ê foz an oll glémou
 Zo grêt din a Isidor abeurs ar goel deodou.

Davantach c'hoas d'ar goude e vestr voe tourmantet
 Dre an nerz eus an domder er parc gant ar sec'het ;
 Mes Isidor en douar e c'harzou a blantas,
 Hac eno, dre c'hraç Doue, eur feunteun a savas.

Unan eus a vugale e vestr quer a varvas,
 Gant eur c'blevet violent, hac en ressuscitas :
 Quer bras voa e garante en andret ar beorien,
 Ma vultipli ar bara da rei an alusen.

Eun de pa yê d'ar vêlin hac eur sac'had ganta,
 Dre eur scoulat morfontus e lêzas da scuilla

An anter eus e sac'had da rei d'al lapousset,
En eun andret en devoa en erc'h disoloet.

An dud pere voa gantàn a gommanç da c'hoarsin,
Da ober goab aneàn ; mes Doue qent ar fin
A recompanç Isidor, a bê e garite,
Rac carg'et voe e sac'had deàn gant larg'ente.

Pa voe en oad avancet, vardo eun trêgont vla,
E choasas evit pried Mari a Gabeza,
Eur grouadurez parfet hac a gare Doue,
Hac en deussan servichet gant peb fidelite.

An ên a roas dêze erfin eur c'hrouadur
Carg'et a avantajou a goste an natur ;
Mes ar maro diremet, dre ordrenanç Doue,
A greis ar fleur eus e oad en lamas digante.

Goude deceđ o bug'el, ar rest eus o bue,
E conclujont assambles miret ar chastete,
Ar yun, hac ar binijen, ar peoc'h, an orêson,
Voa nouritur o ene, plijadur o c'halon.

Goude bea cunduet pell amzer assambles
Eur vue ireprochabl ha leun a zanteles,
Pried sanctel Isidor a rentas he ene
Entre daouarn er Verc'hes, ar Zent hac an Aele.

Ebars en ompinion a Zantes e varvas,
Doue en e fersonach a rê miraclou bras,
Hac ar be en pehini voa e c'horf enterret
A voe gant ar bobl christen a bep tu enor

Ouz an disposition, ar sêson, an amzer,
 Eus ar glo pe a sec'hor, en Spagn en e feder,
 Hac e toug'er en ezom er Processionou
 Gant cals demeus a brofit bepret he religou.

Allas ! setu Isidor e - unan dileset,
 Setu maro e vug'el, ha maro e bried ;
 Setu muntret e galon gant qeus ha gant anui,
 Tristidig'ez, huanad, glac'har ha melconi.

Elêc'h dont da hirvoudal ha da scuilla daërou,
 Evel ma zê ar c'hustum bars et sort ranconchou,
 E souffr gant patienter e boan hac e anqen,
 Hac o sellet an ênvou e parlant evellen.

An arret so positif, eur vech ê ret mervel,
 Renta hor c'hont da Zoue, ar bed-màn dilezel.
 N'en domp qet deut assambles, na n'e dimp qet ive :
 An eil christen a renqo licna eg'ile.

Mab uniq an Eternel da g'enta a varvas
 Hep e veza meritet, guechal var al Lamgroas ;
 Biscoas aboe ar maro na pardonas da zen,
 Nac a dra sur ha certen na bardono biqen.

Hon amzer var an douar n'en dê mert un ure,
 A boan voar deut na renquer partia adare :
 - a deus netra permanant, qement so a dremen
 Eus en eur ber instant evel eur vog'eden.

Dre cu - déc'h, o va Jesus, va glac'har, va zourmant,
 loar hac en enor d'o Passion sanglant :

Setu me brema chomet, allas ! digompagnon,
Ennoc'h emàn va fianç, va c'honsolation.

C'houi so crouer d'an ênvou ha crouer d'an douar,
Infinit en majeste hac infinit en gloar,
Mestr ha Roue absolu demeus ar firmamant,
Qement tra so en antier ouzoc'h a aparchant.

Goude bea anduret bars enpat e vue
Cals a boan hac a fatiq, e plijas da Zoué
Erfin dont d'e retira eus ar bed trubuillus,
Evit bea en ênvou da james evurus.

Er bla mil cant tri-ug'ent ha dec vla c'hoas gante,
Ebars en guir penitant e rentas e ene,
Goude bea recevet e oll sacramanchou,
Exortet e vignonet, ha grêt e adieuou.

E goif a voe enterret gant cals a velodi
Bars en berret Sant Audrean er g'ær eus a Vadri.
Nombr bras a belerinet a deu ato bemde
Da implori e sicour, da visita e ve.

Eun daou-ug'ent vla goude enem aparissas
Da un Itron vertuus, ha dezî e laras:
Procurit d'am c'hoif, Itron, eur plaç enoraploc'h;
Ha dirac ar Vajeste me'm bo sonj ac'hanc'h.

An otrou a Tolede gant nombr a veleyen,
Var ar plaç a zisqennas ar stol en e g'erc'hen:
Pa voe fouillet an andret ma voe bet enterret,
L. goif hep corruption en antier voe cavet.

Qement fleuten en antier a gresq er jardinou,
 Pa deu an neve amier gant o oll parfumou,
 Ne roont qet assambles ur c'hoes qen excelant
 Evel a rentas neuze ar c'horf demeus hon Zant.

Gant cals a zevotion ha cals a vodesti,
 Voe bed a nos transportet da Ilis vrás Madri,
 Bars en Chapel an Escop en Ilis Cathedral,
 Elec'h ma toug'er deàn eun enor special.

Ebars en dranslation eus e goif precius,
 Voe grêt un membr infinit a fejou merveillus,
 An oll gleyer o · unan da son a gommanças,
 Da gals a dud affijet ar yec'het a roas.

Dre gontinuation e rê bemde c'houlou
 En andret e vignonet membr bras à vurzudou,
 D'armud, d'an dal, d'ar bouzar ha d'ar paour impotant
 Ouz e bedi gant fianç e roe soulajamant,

An drouc-spéret a glasqas un nos precipita
 En finfond an abimou eun den devot deza,
 Abalamonr ma seve bars en pec'het marvel,
 Ha ma voa par-conseqant d'e Zoue infidel.

Ar Zant o aparissa a deu da chasseal
 An diaoul trist ha confus d'e brisoniou teval,
 Ha gant eu voes a zouster a bedas e vignon
 Da ober incessamant eur guir gôvession.

Ur fumelen affijet seis vla gant ar c'hlevet,
 Isabel voa he hano ba Tellez lezhanvet,

O visita'r sepultur eus ar Zant glorijs,
A recevas ar yec'het a drugare Jesus.

Sant Isidor o tonet d'en em aparissa
D'eun esclao eus an Turqi en etrol o veva,
En inspiras da renonç a gren d'e falz lezen,
Ma teuas da ambrassi hini ar gristenien.

Pêvar den clân afflijet gant clènvet corporel,
Rentet en extremite en danjer da vervel,
O touch hepqen al lien en devoa lienet
An Otrou Sant Isidor, o devoe ar yec'het.

Cessomp bremàn, va fluen, ha lezomp a goste
Ar rest eus e viraclou, rac cals so aneze:
Ma ve ret dem en antier donet d'o recita,
Na vemp qet prest er vech mân da zont da finissa.

Nê qet eta ep rôson, nac ep bout meritet
E teuas ar Pab Gregoar a hano pempzecvet
Da laqat var catalog ar zent all glorijs,
An Otrou Sant Isidor, favori da Jesus.

Setu echu an histor demeus a e vue;
Imiomp oll anezi gant fe ha carante:
Mar heulliomp e exemplou hac e vertuziou rar,
Eveomp oll evurus un de hep laqat mar.

Tosta amàn, den impi, ha yen eus a galon,
Deus da scol Sant Isidor, disq ober orôson;
Gra dre imitation bep nos ha bep mintin,
Da exercic a gristen humblamant d'an daoulia.

Tud superb, ha colerus, touëtien da Zoue,
 Heullit douster Isidor hac e humilite :
 Pe sort profit oc'heus-u dious ho plasfemou,
 Nac oc'h enoriou mondou, nac oc'h oll bombansou?

Un habitud criminel a so ebars et vro,
 Da brofani allies ar Sulioù, ar Gouëlio :
 Isidor o implije da servicha Doue,
 Oc'h exerci an euvrou demeus a biete.

C'houi, bugale dinatur en andret Mam ha Tad,
 Perac oc'h-u qen cruel, qen cri, ha qen ingrat ?
 Isidor a voa docil bars en qever e re,
 Ouz o zreti gant enor, respect ha carante.

Peg'enlies e pec'her siouas dre injustis,
 Dre anui, dre gourmandis, ha dre an avaris ;
 Isidor a bratiqe ar vertuziou contrel,
 Hac a re d'ar viçou-màn bep moment ar brezel.

Eur re benac a laro : va foan so re galet
 Evit gallout obsetvi ar yuniou commandet ;
 Isidor o observe gant eur galon joayus,
 Nonobstant e fatigou ha labouriou grevus.

Yaouanqis, bezit modest ebars en ho tillat,
 Me o conjur da veva bepret herve ho stat ;
 Isidor a voa contant eus e gondition,
 Ar gloar voa poeson deàn, ar bed-màn eur prison.

Ma carfe al Labourer bemde var e labour
 Qemeret Sant Isidor evit e vezilour,

E c'hoemlemp ar vedisanç, ar c'homzou golôet,
Souden en guir charite ha purete chanjet.

Mes na veler er c'hontrel nemert ambition ;
Finesse, ha tromplenes, ha pep sort trahison :
Ar bed-màn ê hon idol, ar c'hig, an aerouant,
Ha na sonj qasi nicun ebars er jujamant.

En ân pa zàn da bournen var bord ar meneyou,
Ne glêvân nemet disput dre oll bars er parcou,
Medisanç, tamaleres hac injuriou piqant,
Blasfemou, leoudouet, chansoniu insolant.

Setu aze ar motif, ar sujet, ar rôson,
A denn coler ha venjanç Doue Roue an Tron,
Hac a rent infructuus ha vén an oll boaoniou
A souffr al Labourerien bemde er c'hampagnou.

En eur dremen, selaouit eur g'elennadures,
Mar doujit ho consciانç hac ho silvidig'es,
Dilexit ho coal vue, ha pratiquit ar mat ;
Allas ! goude ar maro e vezot diveat.

Na gollit qet a goutaj, résistit constamant
Ouz an dentationou demeus an aerouant,
Supliit Sant Isidor da zont d'o proteji,
Hac e vezoz hep doutanç déch oll guir minichi.

En paros Pleudaniel, escopti a Dreg'er,
Bars en douar an Otrou ar Marquis Pelletier,
En eur Chapel dediet da Santes Helena,
Ema portret Isidor, deut oll d'e vizita.

Bep Lun Fasq ar Pantecost , dre gonje hon Prelat,
 E rer eno ar memoar a Isidor hon tad ,
 Na doutan qet na deuy ar bopl en affluanc
 En deiz-se d'e saludi gant pep sott reveranc.

Eun nombr bras a viraclou a ra Doue dreizàn
 D'ar re a deu d'ar Chapel evit e visitàn ;
 Rei a ra pep plijadur , ha consolation
 Da g'ement den en antier en ped a vir galon.

Un den ar principala eus a Pleudaniel ,
 Tremen a ràn d'ar silanç hep donet d'e henvel ,
 En devoe un accident a greis e joaustet ,
 Al lun Fasq ar Pantecost , ur bla so tremenet.

Var dro nao heur anter voe hep comz na qerzet ,
 Ar bed oll en condaone hac ar vedecinet ,
 Pa voe goëstlet d'ar Chapel e commanças parlant ,
 Ma recevas ar yec'het dre veritou ar Zant.

Ur bug'el bian hanvet Mazeau an Hegarat ,
 Mab Ezuant , ha Fant Callec eus a Enes Briat ,
 Enem veuas dre valheur en eur varazat dour ,
 En gouelen divea , hep gallout caout sicour .

Pa voe entre he divrec'h gant he vam astennet ,
 Qement den a voa presant en crede decedet ;
 Mes Doue , hac Isidor o deus bet imploret ,
 Hac o bug'el en instant a so resussitet .

Dre un destin malheurus , Fant ar Borgn a Dreg'et
 E deus laqet c'hoec'h bug'el , allas ! bars en lumier ,

Hep bea bet an enor da receo badiant,
Nonobstant he oll fatig, he foan hac he sourmant.

Enem gavet ê býazes na divar ar seizvet,
D'an Otrou Sant Isidor ê bet enem voestlet,
Ha dre e brotection e qichen hor Jesus,
E deus bet eur guilioud hac a so evurus.

Guillarm Janvier, habitant eus a Pleuveur-Gotter,
Var ar guele affi jet gant clènvet ha miser,
O vea en angoni, gant an oll condaonet,
Pa voe göestlet d'ar Chapel en devoe ar yec'het.

Eur bug'el a Penverit, impotant er qerset,
O visita Isidor a so bet goellaët ;
Diag'ent na remue nemet var e flac'hous,
Neuse e yas e - unan hac o lesas eno.

Eur bug'el a Pleuvian, o chom bars en arvor,
Goelc'het gant dour vertuus feunteun Sant Isidor,
Elêc'h ma voa diag'ent notet ha daoubleg'et ,
En deus, dre c'hraç un Doue, recevet ar yec'het.

Un nombr bras a viraclou en deus c'hoas operet
Aboe ma zê er c'hanton gant ar bopl invoqet;
Ma ve iet o raconti oll en particulier ,
E teufet da ramplissa nombr bras eus a baper.

Poent bras ê demp finissa hep avanç davantach,
Arreomp amàn bremàn, concluomp hon ouvrach,
Mar leqeomp en pratiq ar pez on eus scrivet,
Evezimp er Barados eun deiz oll curunet.

Supliomp a vir galon hon Tad Sant Isidor,
 Da vea bon Avocad hac hor guir Protector,
 D'on presanti da Zoue en articl ar maro,
 Ha da c'horit ar victor var an oll diaoulou.

Ditijomp oll bon moeziou d'en pedi assambles
 Da apesi un Doue irritet qelliez,
 Da zivoal hou c'horf ato, da zivoal hon ene,
 Ha da veva direproch ar rest eus hor bue.

Deut eta, oll Vretonet, deut oll a bep canton,
 Deut da Zantes Helena da bedi hor Patron;
 Rentit deàn oc'h homach, oc'h henor, ho respect,
 Mar en pedit gant fianç e vezet sicouret.

Sant Isidor so ive en ilis Plouigno,
 Guit Batron ha guir Vignon Labourerien peb bro:
 Deut d'en pedi, Bretonet, eus a greis ho calon,
 Hac o perzo gant Doue e Venediction.

F I N.

G U E R Z

V A R U R P L A C ' H A V E P R I S A S H E Z A D H A C H E M A M .

Var ton Guerz an Danserez.

C LÈVIT, côs ha yaouanq, selaouit, Bretonet,
 Un exempl pitoyabl eus a eur Plac'h debordet,
 Pehini a veprise he Mam coulz hac he Zad;
 Doue e funissas én compagnunes yad.

He c'horf a voa galant, merc'h voa d'eul labourer,
 Ouspen ma voa gloriis, meurbet e voa fier ;
 He zad eus e vicher a voa eur vigneron,
 A chome e qichen ar g'ær eus a Chalon.

Evel ma voa plac'h coant, balamour d'e g'enet,
 Eun den a galite en deus - hi euteujet ,
 En d'oa nombr a vadou hac a binvidig'es ,
 Ma voa re absolu p'oe laqet da vestres.

A ben c'hoec'h vla goude m'oa'r plac'h-ma eureujet,
 He zad i've he mam a voe paour bras rentet ;
 Hac int sonjal o daou dont d'enem resolvi
 Da vont da di ho merc'h en esper chom ganti.

Pa eureujont, en he zi o deus-i goulennet ,
 O sonjal gant joa bras e vijent recevet ,
 O tisclêrya penos voaint he mam hac he zad ,
 Ma teu o merc'h debordet ractal d'o scandalat.

Ar paour qès a dad , o clasq enem sicour ,
 A dennas prest e dôq : bonjour, va merc'h, bonjour ;
 He mam a zaillis pront evit e ambrassi ,
 Mes boutet voe ganti ractal var leur an ti.

Sortiit, emezi, hac it prest alesse ;
 Me ne meus qet a dud hac a ve quer paour-ze ;
 Mez ameus ganec'hu, fê e din-me clêvet
 E vec'h din tad ha mam; mes n'o couzanvan qet.

Evel ma voa nos-dv, e c'houlenjont loja ,
 Balamour da Zoue, er c'hraou da viana ;

An ingrates neuse a ordrenas ober
 O-c'has eus be bisach pront da di he fermier.

Rei a ras en he zi fest ha bal an nosves,
 En amzer ma edo he zad he mam ivez
 Er c'hraou var ar c'holo gant naon en o c'halon,
 Goude rei o daines d'e laqat da itron.

Mes Doue ne fell qet deàn e ve netra cuzet,
 A bermet en nosves-màn ma vije punisset:
 Qeit a m'oa o tansal memes en creis an danç,
 Gant le c'hompanhenez, e vary en o fresanç.

Setu aze ar fin eus ar plac'h ingrates,
 Goude meprisout he zud. M'o ped, laqit eves:
 Cals a ra vel omàn, rac bea zeus merc'het
 N'o deus evit o zud nac honor na respect.

M'o ped a beurs Doue, oli bugale yaouanq,
 D'o tadou, d'o mâmou besit oboissant;
 Doug'it honor dezo ha deut d'o respecti,
 Jesus ne vanqo qet dont d'o recompansi.

F I N.